

## FOAR GWERLISKIN

### La foire de Guerlesquin

Aet e oan d'ar foar da Werliskin  
Evet em boa sistr ha kalz a win

Ar glav an avel a oa yen  
Me a oa er-maez, na ouie ket

Ur vestrez am eus e Logivi  
Met ez eus teir lev da vont di

Pa oan o sevel krapenn ar roz  
Me a gleva taolioù an hanternoz

Pa glevfen taolioù an deiz  
Me a ranko gwelout ma c'harantez

Pa oan erru e toull he dor  
Ne greden ket goulenn digor

Ma mestrez koant digorit ho tor  
Ho servijer a zo o c'houlenn digor

Ne zigorin ket an nor d'ar c'houlz-mañ noz  
Digant ma zad me a glevo trouz

Tri re votoù am eus uzet  
Ma mestrez o vont d'ho kwelet

Ma peus uzet tri re votoù  
Ha pren bremañ galochennoù

Ar galañchoù a zo moan ha berr  
A vo mat dit da chom d'ar gêr

*J'étais allé à la foire de Guerlesquin  
Boire mon comptant de cidre et beaucoup de vin*

*La pluie et le vent étaient froids  
J'étais mis dehors, je ne savais pas*

*J'ai une fiancée à Loguivy  
Mais il y a trois lieues pour aller chez elle*

*Alors que je montais la côte  
J'entendais les coups de minuit*

*Quand j'entendrais les coups de midi  
Alors je verrai mon amoureuse*

*Lorsque j'arrivai à sa porte  
Je n'osais pas demander d'ouvrir*

*Ma jolie fiancée ouvrez votre porte  
Votre serviteur vous le demande*

*Je n'ouvrirai pas la porte à cette heure-ci de la nuit  
Je vais être disputée par mon père*

*J'ai usé trois paires de chaussures  
Ma jolie fiancée pour venir vous voir*

*Si vous avez usé trois paires de chaussures  
Achetez maintenant des galoches*

*Les galoches sont étroites et courtes  
Elles t'iront bien pour rester à la maison*